

# ARVOR

Koumanant-bloaz : 50 lur  
SKRIVEREZH HA MEREREZH  
G. BERTHOU, 72, Str. Oberthür,  
Roazhon (K.R.P. 492-98, Roazhon)

KAZETENN SIZHUNIEK

N'ANKOUNAC'HAIT KET HAS  
C'HWEC'H REALAD timbroù pep  
gwech ma fell deoc'h kemmañ  
ho chomlec'h.



Peder Rann-Yezh  
Ur skritur hepken !

## TROET DIWAR AR GALLEG... Piv a zo a-du ? Ha piv a-enep ?

A-du ez on gant Erwan Danteg, pa c'houlenn hemañ troidigezhioù diwar Baol Feval. Hogen, taolit pled ouzh an troer ! Ne c'hell ket an holl livañ an traoù evel Paol Feval, hag e skafvded hag e nerzh n'int ket aes da dapout. Klevet am eus edo an Ao. Arzel Even oc'h aozañ « L'homme de Fer », diwar hor romantour brudet. Den a-walc'h eo d'ober seurt troidigezhioù ! Euruz e vefen, goude-se, o lenn dindan e blienn ur romant evel « Le Loup Blanc », hag a zo, marteze, ar gwellañ, ar yaouankañ hag ar c'hwekañ romant eus Paol Feval.

DESMONT DE LORIS, Roazhon.

Lennet am eus gant kalz plijadur war niv. 158 « Arvor », ho pennad : « Troet diwar ar galleg ».

Ya ! treiñ traoù a dalvoudegezh a zo mat, meur a wech. Ha perak ne vefe ket lakaet e brezhoneg « Istor Breizh » graet gant Arthur Le Moyné De La Borderie ? Evit enoriñ an den-meur-se, ni a c'houlenno ma vo graet al labour gant daou pe dri skrivagner brezhonek, rak re alies ez erru fariadennoù en droidigezh.

Evit lakaat ar brezhoneg war an hevelep pazenn gant ar yezhoù estren, e vo ret sevel labourioù nevez : romantoù evel « Itron-Varia Garmez », sevel oberoù e brezhoneg eun-hag-eun, evit diskouez d'ar bed ez eus eus hor yezh bev ha kreñv, ur yezh evel ar yezhoù all.

Herri MAHE, Begnen.

A-zivout an enklask goulennet gant « Arvor », niv. 158 :

1. ha mat eo ober troidigezhioù diwar ar galleg, hag ivez, anat eo diwar ar yezhoù all ?

— Ya !

2. ha talvoud a ra treiñ e brezhoneg, oberoù skrivet e galleg gant skrivagnerien hag a oar brezhoneg ?

— Ya !

D'ar c'hentañ goulen e lavaran « ya », abalamour ma kresko

dre se tachenn al lennegezh vrelzhat ; ha, dreist-holl, troidigezh an oberoù a zo ganto un tam-mig blaz ar vro, skridoù estranjourien zoken, evel Pierre Loti, hag all.


D'an eil, e respontan « ya » adarre, rak, ma vez kavet plijadur o lenn levrioù skrivet e galleg gant oberoerien hor bro-ni, hag i brezhonegerien peurliesañ, na gwelloc'h, dudiu-

soc'h, sasunoc'h e vijent kavet, troet e brezhoneg.

Gwelloc'h e vefe gant kalz Bretoned, divroet, harluet, peogwir eo re vihan Bro-Vreizh-lzel evit he holl bugale, kaout levrioù brezhonek da lenn e-lec'h skulzhañ gant sorbionnoù ha rando-nennoù skrivet e trefodach Bro-C'hall.

Paol GWILHERM, Tonnay-Charente.

### ROAZHON, kêr-benn ar brezhoneg



Ti-Post Roazhon. Alese eo e sav bep abardaez mouezh vrezhonek paotred Radio « Roazhon-Breizh ».

### An Amzer o Tremen

E Rusia, n'eus ket ehan d'ar c'hrogadoù abaoe deizioù kentañ miz Gouere warlene. Tamm ha tamm, e kendalc'h an Alamaned da gilañ. — O menoz kuzh o deus evit-se, hep ket a var. — Naren avat hep dar-c'haouiñ taolioù reut gant o enebourien. Dere'hel a reont penn e-tal Narva, war harzoù Esthonia. Ne fin-vont ket, kennebeut, diwar vord ar Beresina, al Jenn Peipous; ha war hent Luga da Pskov. Dilezet o deus avat kêrioù evel Krivoi-Rog, Vitebsk, Rogatcheff, h. a.

En Itali an Traoù, e chom sac'h ar Saozon-Amerikaned dirak dismantrou kêr ha kouent brudet Cassino. En em zifenn a rankont ivez — e-lec'h mont war-raok — e penn pont Nettuno hag Anzio. Kalz listri brezel ha marc'hadourezh a gollont da-se.

### Pe seurt micher deskiñ d'am mab ? gant Per LOUEDEG

An heñcherezh micherel, ganet e dibenn an XIX<sup>e</sup> kantved, peogwir e gaver en Alamagn adalek 1895, en em astennas el lodenn vrasañ eus ar broioù e derou an XX<sup>e</sup> kantved. Bez' ez eo frouezh labourioù tud, evel Pierson, a selle dezho lakaat anaoudegezh ar speredoù en implij en ur harpañ ar gerent da zibab evit o bugale ur vicher diouto ha sikour ar vro da gaout tud a zoare e pep lec'h, dreist-holl en ijinerezh.

Pemp rummad a c'heller ober eus ar vugale en oad da zibab ur vicher :

Kentañ rummad : ar re a zibab micher o zad ; kement-se a c'hoarvez dreist-holl gant mibion al labourerion-douar hag ar genverzhierion. Peurliesañ n'o devo ket faziet ha n'eo ket evito eo bet ijinnet an heñcherezh micherel. Koul-skoude hini pe hini eus ar vugale a c'hello bezañ divarrek da gemer micher e dad abalamour d'e yec'hed wan, da skouer, evit ur c'houeriad.

Eil rummad : ar vugale o deus graet studioù klasel hag o deus graet berzh. Ar re-mañ, pa ne vezont ket re niverus, pezh a c'hoarvez bremañ, o deus dibabet mat ivez.

Trede rummad : ar vugale o deus graet hep berzh studioù n'oant ket graet tamm ebet diouto.

Pevare rummad : ar vugale a fell dezho mont en ur skol vicherel pe deskiñ ur vicher diouzhtu.

Pempvet rummad : ar vugale a rank gounit ar c'hant hep gortoz pelloc'h hag a rano n'eus forzh petra : ur Yannig ar mil vicher e vo eus pep hini anezho.

An tri rummad diwezhañ eta o devo ezhomm dreist-holl eus an heñcherezh micherel. Rak heñchet e lleont bezañ hepken : n'heller ket, diwar daou abeg, merkañ ur vicher rest d'ar bugel hag e redtañ da vont warni :

1<sup>o</sup> Arabat mont a-enep da franklz an den ;

2<sup>o</sup> Ar bugel n'eo ket donezonet evit ur vicher hepken met kentoc'h evit ur strollad micherioù kar an

## BREIZH HAG AL LABOUR-DOUAR

Pe baour pe binvidik eo hor bro ?

Gwechall, p'edomp er skol, e veze desket deomp en hol levrioù, e oa hor Breizh ur vro baour, ur vro goloet hepken gant koadoù, lanneier ha mein; ur vro, ne ziwan enni nemet brug, lann, balan ha raden; koulskoude, en un nebeut tachennoù bihan, gwelloc'hik eget ar re all, e veze lakaet segal, heiz pe avaloù-douar.

Evit gwir, gwechall, daou pe dri c'hant vloaz 'zo n'oa ket Breizh ur vro binvidik; paour e oa zoken evel holl vroioù all Europa. En amzerioù-se ne oa ket anavezet an doareoù-labour a navezomp hag ar binviachou-labour n'oant ket kennebeut eus ar re wellañ. Dre-se ne oa ket an douar labourer ken mat ha m'eo bremañ, na trempet ken mat kennebeut; rak, en amzer-se, n'anavezet evel tremp nemet an teil, ha, war an aodoù, ar bezhin.

Epad an daou pe dri c'hant vloaz diwezhañ, avat, eo bet kement en hor bro doare al labour-douar; setu m'eo deut bremañ da vezañ unan eus broioù pinvidik ar bed; rak, ma ne veze eostet gwechall, e Breizh, nemet segal, heiz hag avaloù-douar, evel ma lavare hol levrioù skol, hiziv, e kaver enni, pe dost, kement tra a zo ret evit en em vagañ hon-unan.

Bremañ dreist-holl, en amzer-vezel, e welomp pinvidigezh hor

bro; bremañ, pa vank kalz a draoù deomp, nag a dreñadoù, nag a garadoù bevañs a ya kuit eus hor bro evit magañ tud ar broioù all; ha koulskoude, ne vez ket eostet kement a drevadoù hag a-raok ar brezel, dre ziouer a ludu, hag ivez, e meur a diegezh, peogwir eo chomet unan pe meur a hini eus ar baotred du-hont, prizionid; hag ivez, peogwir ne gaver ket atav ar binviachou a zo ret evit labourat an douar a-zoare.

Met, daoust da se, emañ Breizh bremañ ur vro binvidik e-keñver al labour-douar ha pinvidikoc'h e teufe da vezañ c'hoazh ma vefemp, ni, koueriated Breizh, sikouret ha kenteliet mat, ha ma karpemp en em unaniñ holl evit difenn hor gwirioù; rak, pa ne vez nemet unan o c'houlenn un dra bennak, ne vez ket selaouet alies, e-lec'h, pa vezer kant, pemp kant, mil, pe ouzhpenn, mouezhioù an holl unanet a vez selaouet buanoc'h. En em unanomp eta, koueriated, evit difenn al labour-douar a ra pinvidigezh ha nerzh hor Bro-Vreizh.

Bremañ e lavarin ur ger bennak diwar-benn ar pezh a ra pinvidigezh hor Breizh war ar maez : ar c'hezeg, ar c'hatal-korn, an denved, ar moc'h, ar yer, an edoù, al legumajoù, ar gwez frouezh, ar gwenanerezh, al lin, ar c'hanab hag all, an holl draoù a vez savet pe eostet en hor bro hag a dle-femp sevel hag eostañ fonnusoc'h c'hoazh.

### Ar c'hezeg e Breizh

Hor bro a zo unan eus ar broioù ma saver ar muiañ a gezeg enno. E kement korn-bro e Breizh, e saver kezeg, war ribl ar mor evel e-kreiz ar menezioù. Met e Bro-Leon hag e Bro-Gernev eo e kaver ar muiañ anezho. En div vro-se e saver war-dro 150.000 penn-kezeg, lodennet an hanter e pep hini. E Breizh a-bezh e saver war-dro 350.000 penn-kezeg.

Meur a ouenn gezeg a gaver en hor bro : kezeg skañv, kezeg pounner ha kezeg a wad; lod a zo evit labourat ar parkeier, lod all evit stlejañ kirri war an hentoù, lod all, skañvoc'h, evit redek. E-touez ar gouennoù kezeg a gaver e Breizh, ez eus teir hag a zo brudetoc'h re all. Eus an teir-se eo e vez savet eget ar re all. Eus an teir-se eo e vez savet ar muiañ a gezeg en hor bro.

(Kendalc'h paj. 2)

## Ilizoù prizius Italia hag ar bombezadegou

Meur a wech ez eus bet kaoz ganeomp war Arvor diwar-benn fallagriezhañ dall ar bombezadegou diwar girri-nij.

Mat eo pep tra d'un nijerezh o leuskel tarzherezhioù ha boued tangwall eus barr an oabl; mat eo pep tra : kristenien bihan ha bras, tiez paour ha kran, kêrioù bras ha maezioù dindan eost, listri war vor hag ilizoù war zouar.

N'eus ket pell e kontemp doareoù domani ar Pab, Kastell-Gandolfo, ha koshañ kouent bro-Italia, krouet tremen 1.200 vloaz 'zo, gant sant Benead, abati ar Menez Cassino.

Abaoe ez eus c'hoarvezet gwal-leurioù euzhus ganto. Bombezet eo bet, un estlamm, domani ar Pab, ha lazhet eno un 800 den bennak, beleien, surezed ha siveded. Kouent kozh ar Menez Cassino, eñ, n'eus ket mui maen war vaen ane-

zhañ : pulluc'het eo bet pizh-rae'h gant bombez-tarzh an Amerikaned... Pezh ne vir ket ouzh an Alamaned da vezañ atav e kêr Cassino.

(Kendalc'h p. 2)

### Selaouit 'ta !

□ Gortoz a raer dizale, eus ti « Skridoù Breizh », levr BARZHONIGOUP Roparz Hemon.

□ Hep dale pell ivez e vo embannet romant fentus ar skrivagner brudet Jakez Riou AN TI SATANAZET.

### Piv a lakaas

ar c'horf marv e kouf ar c'harr-tan ?

evit hen gouzout lennit...

EN UR RANBREAL

romant nevez

Y. - V. KERWERC'HEZ

### AN DOARE-SKRIVA NEVEZ

gant Roparz HEMON

— IMPRIMERIE CENTRALE DE RENNES —  
7, Rue des Francs-Bourgeois, RENNES  
Priz : 16 real.

## Keloù eus Skol Blistin LIZHER UR PAOTRIG

Ur wech an amzer, e teu deomp keloù eus skol vrezhonek Blistin, a ya ker brav en-dro dindan renezh Kerlann, skolaer ha den a vicher barrek hag aketus.

Pal kentañ skol Blistin a zo eveljust deskiñ d'ar vugale, mes e brezhoneg, lenn, skrivañ, kontañ ha niveriñ. He c'hefridi a zo ivez avat deskiñ brezhoneg da vugale, da Vretoned vihan bet savet e galleg.

Ha mont a ra ar re-mañ war-raok ?... Efedusoc'h ur skouer eget

kant prezegenn. Ha setu amañ da heul ul lizher a ziskouez pegen brav e tironestl e neudenn ur paotrig, ne ouie nemet galleg un nebeut mizloù 'zo. Skrivet eo bet al lizher-se gant Arzel Jeusset, eus Roazhon, dek bloaz. N'emañ e skol Blistin nemet abaoe pevar miz. Hen diskriuañ a reomp dres evel m'emañ :

Blistin, 20 a viz C'hwevrer 1944.

TAD KER,

Me a grog ma lizer en ur bokañ dit. Hiziv me 'zo aet d'ar c'hatekiz a goude, ur mab archer n'eus lavaret din, te zavont d'ober brezel ganif a me 'm eus respontet dezhañ ya. Roet m'eus dezhañ un taol dorn en he chiñk ha goude-se zo aet da lavarout an dra-se d'e vamm en ur redek en archer-di, me a echu ma lizer en ur bokañ dit.

ARZEL.

### GOULENNIT !

### Traoniennoù ha Kaniennoù - mor

gant

Lan DEVENNEG

Priz : 50 lur

SKRIDOU BREIZH, BREST  
33, STRAED TRAVERSE

KABIT  
KELIER HA KONTADENNOU  
DA « ARVOR »





